

# Istor an dudi hag an deskadurezh pobl

Hiriv, e oaran n'eo bet ganet mab-den nemet evel boud da vezañ ha na deu danvez ennañ nemet er pezh a c'hellfe dont da vezañ. Kement emgann nac'het zo dezhañ evel ur marv spazhet, drochat bac'h warnañ e-unan.

Glenmor



Stag ouzh istor ar Republik eo istor an deskadurezh pobl er Frañs. Ganti ez eus bet stummet keodedourien tost o c'halon ouzh ar frankiz, an ouiziegezh, an ingalañ. Ha tamm-ha-tamm eo bet dilezet ganto ar spered mirour a rene e metoù ar pennoù bras, evit kas ar Republik war-raok.

Klask kompren penaos ez a ar bed en-dro, pehini eo plas pep unan er gevredigezh ha perak, ha dre-se kemer perzh er stourmoù a-stroll evit gwellaat an traoù war an dachenn bolitikel ha sokial : setu spered an deskadurezh pobl.